



## HISTOR ADMIRABL

# DEMEUS AR BOUDEDEO

Pehini, abaoe maro hor Zalver, ne ra nemet  
bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed.  
abalamour d'an affrontiri an devoa bet en  
andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa  
voa o vont d'ar maro; a falvezas dezan dis-  
quisa var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel  
eur scelerat.

Var ton : Guerz Santez Anna.

Asistantet enorabl, tostait da glèvet  
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas er bed;  
An histor zo truezis demeus ar Boudedeo,  
A zo nòs- deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a dribu Nephtali, a guér Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, carget a anathiem ;  
Dont a ras var ar bed-ma en amzer Herodes,  
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verc'bez.

Va zad a voa eur c'halve, va mam qemenerez,  
Hac a laboure en Templ da ober broderes;  
Ha va c'herent am desgas da lenn leor al Lezen,  
Hac hini ar Brofetet iveau a dra certen.



Goude e voen demeet gant va c'herent anfin  
Da eur vreg sur ha prudant a dribu Benjamin,  
A biu'm boe tri bugel en amzer ma teuas  
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a gconvertissas calz euz a bayanet  
Pere voa idolatret, caledet er pec'het :  
Dec mil den en un devez en deveus badeet  
Me, va gred. va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : Va fried emezi,  
Leqomp en em vadezi , enont è ar Messi;  
Ha me o respont dezi, gant eun ear direspet:  
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aden eun nebeut goude S.Yan voe dibennet  
Dre urz'roue Herodes, eun den cruel meurbet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit rën en e blaç ;  
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras

Clèvet e meus bet Jesus alies o sermon,  
Hep ne meu bet profitet euz e bredisication ;  
Va-unan e voan presant p'en d'oa rassaziet  
Dec mil den gant pemp bara ha goude ze pesquet

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoa souden  
Jesus o ressuscita Lazar, breur Madalen,  
Ha güelet dibossedi calz a dud possedet,  
Ha sivoas din pec'her bras ne meus tam profitet

Aben eun nebeut goude voe Jesus qemeret  
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,  
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zongen  
Ar groas pouner ha mezus evit ar bee'herien.

Pa voe ar groas achuet, d'hor Zalver voe samet,  
Da vont da venez Calvar da vea crucifiet :  
O velet an dud o redee, me gemer va bugel  
H: me mont da dal an nòr pa yé en da vernel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,  
Pehini en tal va stal a deu da reposi,  
Ha me lavarat dean gant eur gomz arrogant :  
Qé alesse eus va stal, te zoe un den mechant.

Ganes on dizenoret gant da iffronteri,  
Pa qüelan o reposi aman e tal va zi:  
Qe alesse, den ingrat, cos sorcer milliget,  
Qe alesse d'ar maro, pa c'heus e meritet

Jesus a respontas din gant eur voez truezus :  
Mont a ran da bartia, den fall, den maleürus,  
Me reposo gant va Zad, te valeo bepret  
Dre bëvar c'horn a bed-ma ac'han da fin ar bed.

Ia, te a valeo ac'han d'ar jujamant,  
Hac er c'hoste deo d'am Zad a velo suramant  
O varni ar bec'herien pere vo condaonet  
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glévis comzou Jesus, va c'halon voe toucheit  
Ha me rëi va bugale en instant d'am pried,  
Ma velis ar Veronic o see'hi bisach Jesus,  
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus,

Hep ellont' n'em arréti e heuillis hor Zalver,  
Hac e velis va Jesus ha calz gragez santel :  
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret  
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staget.

P'am boe güelet hor Zalver o vervel var ar groas  
E creis etre an daou laer carget a boaniou bras,  
Ha me commanç va beach gant calz eus a anqen,  
O tont da laret adieu da gær Jerusalem.

Sònxit eta, Bretonet pegement a c'hlac'hар  
En deus ar Boudedeo bremà var an donar!  
Rancout qüittat e gartier, e vreg, e vugale,  
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoa haleet enn nombr a slaveziou,  
Ee'h éruas en Egypt, pel bras demeus e vrò,  
En e mà o ar Mor-Rus, elec'h m'oé tremenet,  
Moyses gant pohl Doue, hep cavout drouc ebet

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,  
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni:  
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou  
E verc'h evit sacrific da réi d'o doenou.

Mont a ris da Malbodo, e pelec'h eus tud droi,  
Pere a aler Doue hac an djaoulou oll;  
Pedi a reont Doue da gaout prosperite,  
Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc déze.

Güelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel  
Pini' deuas da laza, sivoas, he daou bugel.  
Er vró-ze è permettet laza ar bugale  
Pa n'o deus qet a vara da réi déze.

Goudé' qemeris an hent da vont d'an Eoezi,  
D'an Americ, d'an Azi, ha neuze d'an Turqi.  
Ar gragez eus var vro-ze a vele d'an arme,  
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,  
Nemem unan dre famill na ve james miret.  
Bez'o deus eur rouanez a ro commandamant  
Da laza an oll botret, hep caout dè nep damant.

Er gær eus a Garniol eus ur c'bis drol meurbet  
Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,  
E râncô ar vreg yaouanc, nos qenta he heured,  
Mont da gousket gant ar prinç, vit bea enoret,

Bet on ebars eur c'hood hanvet Cisaria,  
Elec'h ma eller bale cant léo d'an nebeuta  
Hep cavet dour da eva, da feunteun na rivier,  
Ar pez zo goal incomod oll dud ar c'hartier.

Monet a ris c'hoas pelloc'h, d'ar gær a Vosopa  
Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :  
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,  
Ha n'en deus qen soudardet evit difen e vrô.

Ac'hane'yis da eur gær zo hanvet Estopet,  
Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet  
Zo qer teo ha corf ui den sur ma vent muzuret  
O deveus d'an nebenta daou-ugent troatad het,

Er spaç demeus a gant vloas ez ou bet o vale,  
Ha me éruout adare em brô bac em c'hontre :  
Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,  
Ha den ebet eus va brô certen n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,  
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni :  
Güelet'ris merzeria nombr bras a gristenien,  
En defot ne renoncent d'a feiz ha do lezen.

Me a vale var ar mor coulz ha var an douar  
Ha me partial neuze evit ar Franç, bro rar?  
E Marseill, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon  
Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar gær vrao a Roazon

Guelet e meuz Montroulez ne voa nemet eur c'hood,  
Ha güelet Brest ha Qemper ebars en douar prat  
Ha güelet ar gær a Is en e frosperite,  
Hac ar gær a Lexovi a meus güelet ive.

Güelet emeus Breiz-Izel en coad ha meneziou,  
Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vrô;  
Me a vel calz a gériou er vrô-se batisset,  
A ra calz a chenchamant abaoe ma zon bet.

Me vel ar gær a Roazon eur gær gaer batisset  
Dol, Gûenet ha Sant Malo, Dinan hac an Naonet,  
Sant-Brieuc ha Landreguer, Lanion, Montroulez  
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne iveau.

Ar c'hériou ze meus güelet e coad bac'en prajou  
Pa deuis d'ober va beach qenta ebars er vrô;  
Cetu batisset Qemper, ha Brest he Recouvranc,  
Qemperle, Moelan, Kerabes ebars en assuranc.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,  
Me zo bet en em gavet e creis meur a arme;  
Canoliou a fusuliou, clezeyou, sabrennou,  
Netra ne dê bet capabl da rêt din ar maro,

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,  
Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,  
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet  
Comzoum Doue a râncou bea accomplisset.

Condaonet e zon gantà da chom var an douar;  
Comprenit oll christenien, emâ zo din glac'har!  
Va zourmanchou er bed-mâ biqen na èchuo  
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godele bepret,  
James gant nep seurt clenvet me ne dont attaqet,  
Bet on ebars en broyon elec'h m'oa ar vocen,  
Hep na zeus staget ouzin na clenvet nac anqen

Va boutou na na va dillat james na uzont qet,  
Dre bermission Doue a meus bet offanceet;  
Peder guech e meus redet pèvar corn ar bed-ma  
Ha gueilct e meus ive calz chenchamant ennâ

Bremâ e zon comancet da redec ar bempet,  
Hep ne don ambarasset gant dibri na coussqet;  
Güelet a meus bet broyou zo bet oll revinet,  
Ha calz demeus a gériou gant ar gurun dèvet.

Ne meus qet calz amzer evit chom da barlant,  
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant  
Nan, ne zeus nemet Doue a else disclèria  
Ar boaniou bras a souffran qerqent ma reposan.

Pebes maleur è din-me bea bet rebutet  
Demeus a gichen va stal Jesus Salver ar bed  
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza  
Ha me neuze dre valeïr a zeuas d'e zispriza.

Emà è ar maleor bras a meus var ar bed-ma ?  
E mon atao o vale oussen trivach' éant vlaq  
Ha c'hoas e ranqan bale ac'hant da siu ar bed  
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joäustet,

**FIN.**

Héb ar voos salig osoù un slosavet dae undez

A gounoù da ar voos salig lamm ar monec da

Un permission d'oue a vezet per ouffete

Yedel broug a meur a 1500 degar corioù ar bed-ma

Il lezel e waz iyo goz cheugennant enez



Il lezel e waz iyo goz cheugennant enez

Il lezel e waz iyo goz cheugennant enez

Gouezet a meur PST pionon zo per Ille-tolente

Il lezel e waz iyo goz cheugennant enez

Il lezel e waz iyo goz cheugennant enez